

Klasoù dañsal pe soniñ : tenniñ skiant ag oberoù arzel e skolaj Rewiz

- Culture
- Publié le Friday 14 February 2025

Lod skolajiaded zo doazh àr ar matematikoù, lod arall zo donezonet kaer evit ar sonerezh... pe an daou àr un dro. Perak pas lakat an talantoù da vonet asabl ? Skolaj Rewiz a-gevret get Skol-arz Sarzhav a gennig klasoù get eurioù kempennet d'ar skolajiaded evit ma c'hellehent deskiñ dañsal pe soniñ ur benveg àr o amzer-skol. Ar skolajiaded a faot dezhe krogiñ geti a c'hell ivez dibab e-mesk an daou hentad-mañ : sonerezh pe dañs. A-hed o studioù er skolaj e c'hello o eurioù bout kempennet evit ma c'hellehent deskiñ danvezioù hollek e-ser deskiñ soniñ ur benveg (biolin, alto, violoñsel, saksofon, binvioù tos pe fleüt-treuz) pe dañsal (jazz ha dañs a vremañ). Pleustriñ en ul laz-soniñ, monet d'ar sonadegoù en Erminig, dañsal dirak an dud, diorren e skiant varn... Ur skrid-sonerezh karg a santidigezh hag a arlvioù zo kenniget d'an danvez skolajiaded !

Pleustriñ a-stroll, evel en ul laz-soniñ, a vez graet ar muiañ ar gwellañ.